

Lodenn III-Rol Frañs hag Unvaniezh Europa er bed

Tem 1. Unaniezh Europa, un unaniezh Stadoù

Ur sevel dibar:

Get **28** Stad ez eo en Unaniezh Europa.

Abaoe 1986 ar Stadoù nevez en UE zo dreist-holl re a **Europa Kreiz hag Europa reterel** àr-lerc'h bout dieubet doc'h ar beli komunour er blezadoù 1990.

Ar c'hêrioù europat a chom en Europa kornôgel :stadoù diazezourien an UE:**Parlamant Europa** e Strasbourg(Frañs.);**Komision Europa** e Brukels(Belgia);**Lez justis** e Luksembourg(Luxembourg);**Bank kreiz** Europa e Frankfurt(Alamagn)

Ur marc'had boutin: frankeskemmoù ar marc'hadouriezhioù, ar c'hevalaoù

Egor Schengen: giwr mont-dont evit an dud

Moneiz boutin: Euro

Politikerezhioù boutin: PAC, Erasmus, Karta ar gwirioù diazez...

Met diforc'hioù tiriad en Unvaniezh Europa:

-dizingalderioù etre ar Stadoù ar C'hornôg, pinvidik ha diorret hag ar Stadoù ar Reter, dale gete àr an dachenn ekonomikel ha sokial.

-dizingalderioù-rannvro etre ar rannvroioù lañs gete liammet mat get ar c'hreiz(ar meurgêrioù bras) hag ar zonennoù get dale a ya d'ober marzoù ar reter hag ar su(àr ar maez pe o-unan).

Diskoulm: ar politikerezh kenstagiñ a-benn digreskiñ an dizingalderioù-rannvro en UE

Raktresoù a bep seurt arc'hantet get aozadurioù disheñvel a UE Pal dezhe eo digreskiñ an dizingalderioù etre rannvroioù a UE.

FSE: fonds social européen(font sokial europat): lise Cérusier e Karaez

FEDER: fonds européen de développement régional(font europat evit an diorren ekonomikel ha rannvroel): kaout an uhelgas e departamant 22; un eil-pont etre Roumania ha Bulgariz àr an Danav.

FEADER: fonds européen agricole pour le développement rural(font europat al labour-douar evit diorren ar maezioù)

Stadoù o deus embannet o c'hoant da vont e-barzh an UE

Stadoù nevez ezel ag an UE a c'houlenn
bout er zonenn euro hag an egor Schengen

Stadoù tost doc'h ar Stadoù diazezourien
Ezel ag ar zonenn euro/pe ag an egor Schengen

Stadoù diazezourien
Ezel ag ar zonenn euro
Hag an egor Schengen

